

PARDON DE SAINT JEAN - BAPTISTE

REFRAIN

NI HOLL KRISTENIEN AR FOUILLEZ
Warzu enn-hoc'h ha zav hor mouez
Karet hoc'h bet gant hor Zalver
C'hui zo prophet, c'hui zo merzer.

1

E'touez bugale ar merc'het
Biskoaz nikun n'eus bet kavet
A ve brasoc'h eget Sant Yann :
Jezuz hen lavar he-unan.

2

Iaouankik c'hoaz el lechiou gouez
Hoc'h bet kaset gant an Elez,
Pell diouz an dud, tost da Zoue,
C'hui jomas par, korf hag ene.

3

Na rust eo bet he binijenn
Kroc'hen kanval en he gerchenn,
Kiskoaz na guin, na tamm bara,
Griziou c'hoero evit beva.

4

Dre nerz ho mouez, eil Elias,
An desert oll a dregernas,
Kals pec'herien deuas d'ar Jourdin
O skei gant keuz var ho feultrin.

5

Setu Jezuz, Salver ar bed,
O tont da veza badezet;
En eur grenna, Yann Vadezour,
War benn he vestr e skuil an dour.

6

Ma krenit dirak Mestr ar bed,
Dirak an dud ne grenit ket,
Tavit, tavit, tud digalon,
Ar profet bras n'oar ket kaout aen.

7

" Selaou, Herodez, te ra fall
" Derc'hel ganez pried euh all;
" Varnhot, varni, hag hep dale
" E pouezo dourn justis Doue."

8

Eur c'heg gant he merc'h danserez
A reas d'eoc'h hu koll ho puez
Malloz d'an danz ha d'ar visou
Goad hag ifern ouz ho zeulicou !

9

He benn santel zo digaset
War eur plat e-kreiz ar banket :
Sell ouz penn lann, Herodez kris,
Ar penn-se e veli noz-deiz !

10

Mervel zo berr, dir ar c'hleze,
D'ar merzer eo aic'houez an Ee,
Na c'hui zo kaer e lez hon Tad,
Badezour badezet er goad !

11

Skuillit bennoz war pep hini
A zikouras sevel ho ti,
En hor buhez, en hor maro,
Kemerit soursi anezho.

